

HC_0012_Polka Plin

Nag an deiz all 'penn ar bern plouz
Me soñje kousket didrouz.

Nag e tremen reas ur yar
Na krene ganti an douar

War he lerc'h ur pikol louarn
Pichet gantañ e zivskouarn

Al laboused 'begoù ar gwez
Hag a lâre 'n eil d'egile.

Gwashoc'h eo ur sparfell rous
Evit ul louarn hag ul louz.

Ar sparfell rous gant e veg kamm
Lazh an tad, 'displuñv ar vamm

Kemen hini yay d'an ifern
A vo debret kig hag eskern.

Neuze erru ur pilhaouer
da werzhañ pilhoù en tier.

Nag azañ (azezañ) rae deus ma c'hostez
'vit ober e gouzk kreisteiz.

Ne oa ket kozh aze'et
Me welas al laou 'redek.

Skarzh(it) alese pilhaouer lous
Na skarzit diwar ma flouz

'Vont d'ar pardon da Wareg
N'imp hon daou meump goune'et

Unan c'hanomp oa sacher yod
Hag an all lonker layout.

Unan c'hanompoa un dañser
Hag un all oa ur c'haner

Unan c'hanomp oa butuner
Hag un all oa merc'hetaer.